

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat :  N° d'inscription :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le :  /  /



1.1

## Évaluation Commune

**CLASSE :** Première

**VOIE :**  Générale  Technologique  Toutes voies (LV)

**ENSEIGNEMENT :** breton

**DURÉE DE L'ÉPREUVE :** 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe2 « Espace privé et espace public »**

**CALCULATRICE AUTORISÉE :**  Oui  Non

**DICTIONNAIRE AUTORISÉ :**  Oui  Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

**Nombre total de pages :** 4

**Baccalauréat général et technologique**  
**Langues vivantes régionales - Breton**

**Classe de première**

**Epreuve 2 : Compréhension de l'écrit et expression écrite**  
**(3<sup>e</sup> trimestre)**

<b><u>Niveau visé</u></b> <b>LVB : A2-B1</b>	<b><u>Durée de l'épreuve</u></b> <b>1 h 30</b>	<b><u>Barème 20 points</u></b> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'axe 2 du programme : « **Espace public, espace privé** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

**Marine Vallet, sportourez kalonek**

Bep noz, pe dost, goude he devezh-labour ez a Marine Vallet, 24 bloaz, da c'hourdonañ war stad Robert Poirier e Keryann pe war hini Courtemanche. Ijinourez eo Marine ha kampionez bro Frañs 2017 e sal ha beskampionez 2017 er-maez, eo war un dro. Er mareoù-mañ emañ ar vaouez yaouank o prientiñ kampionad Frañs, hag a vo dalc'het e-kreiz miz C'hwevrer : « mont a ran da c'hourdonañ 6 pe 7 gwech bep sizhun », emezi. Kampionadoù an hañv a vo dalc'het e miz Gouere. « Met n'eo ket ar pal pennañ, eme ar sportourez yaouank. Evidon-me, ar pezh a gont eo gellout en em ginnig e kampionadoù etrebroadel ma-unan, ac'hann da 3 pe 4 bloaz ».

**Studioù ha sport war un dro**

Graet he doa anaoudegezh Marine Vallet gant al lamm-a-serzh<sup>1</sup> un tamm dre zegouezh pa oa hi er skolaj, e Dunkerque. Abaoe, n'he deus ket dilezet ar sport-mañ morse, ha deuet eo a-benn da heuliañ he studioù en ur genderc'hel gant ar sport a-live uhel-mañ. « Biskoazh ne 'm eus soñjet chom-a-sav gant ma studioù evit ober sport hepken, a zispleg Marine. Pa oan en em gavet e skol ijinourien an INSA<sup>2</sup> e Roazhon e oa bet kinniget din ur

<sup>1</sup> Lamm-a-serzh, pe lamm uhel : klasket vez gant an atletour mont an uhelañ ar gwellañ dreist ur varrenn.

<sup>2</sup> Institut National des Sciences Appliquées

c'hursus un tammig hiroc'h, evit skañvaat al lusk etre ar sport hag ar studioù, met ne 'm eus ket bet c'hoant. Ret eo bezañ urzhiet mat ha plijet bras e oan gant ar pezh a studien. »

Goude an INSA hag ur bloavezh en IGR<sup>3</sup> e Roazhon e kendalc'h Marine Vallet gant ur staj e ti Eiffage Energie Système Ferroviaire, un embregerezh vras staliet e Roazhon hag a heuilh mont-en-dro an LGV<sup>4</sup>. « Daoust d'an implij-amzer karget mat, etre 35 ha 40 eurvezh bep sizhun, e kendalc'hen da vont da c'hourdonañ ingal », a gont Marine. Hag an embregerezh da ginnig dezhi ur gevrad « CDI » 60 % eus an amzer-labour hepken. « Ur chañs bras eo evidon ! 24 bloaz on hepken ha war an hent mat emañ evit al lamm-a-serzh. Bremañ eo e rankan klask mont war-raok, ha n'eo ket warc'hoazh ! Labourat war 60 % a ro din amzer da vont da di ar c'hine<sup>5</sup> alies ha da ziskuizhañ gwelloc'h, etre daou brantad-gourdonañ ».

### **Trofe ar sportourez amatour**

Souezhet bras eo bet ar sportourez yaouank o resev trofe ar sportourez amatour, da-geñver Prizioù ar sport aozet gant kêr Roazhon. « Un tammig lent on, ne blij ket din en em lakaat war wel, met degemer an trofe-se a lak al lamm-a-serzh da vezañ anavezet gwelloc'h », emezi. Soñjal a ra ivez Marine er re yaouank : « diskouez a ra an trofe-se e c'heller ober studioù ha labourat, ha bezañ barrek war ur sport a-live uhel war un dro. Ret eo bezañ kalonek hag arabat selaou ar re a lavar eo dibosupl ober kement-mañ ! »

Diwar Anna Quéré, [www.metropole.rennes.fr](http://www.metropole.rennes.fr), 29/01/2018

## **1. Compréhension de l'écrit (10 points)**

- a) Peseurt doare sportourez eo Marine Vallet ? Displegit.
- b) Deskrivit he hentad-stummañ. Ur vicher he deus hiziv-an-deiz ?
- c) Meur a raktres he deus Marine Vallet war un dro. Displegit.

---

<sup>3</sup> Institut de Gestion de Rennes  
<sup>4</sup> Ligne à Grande Vitesse  
<sup>5</sup> kinésithérapeute

## 2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

### Goulenn A

Un dudi ho peus e-maez al lise ? Kontit perak e plij deoc'h ha kemerit harp war an talvoudegezhioù a vez douget gantañ.

### Goulenn B

Hag-eñ e c'hell un dudi a-live uhel (sport, sonerezh...) klotañ gant ar studioù hag al labour ? Roit ho soñj diwar skouerioù anavezet ganeoc'h.